


Eurmennata rànc'hoas qent disqener Menez;  
 Me a garre plijout da galon va mestrez :  
 Rouanez ar Muset, ho pet attention  
 Qent ma zin da repos canomp dezi ar zon.

FIN.

## CHANSON NEVEZ

*Var sujet eun ozac'h zo bet fouettet gant evreg.*

*Var ton : Bretonet, d'en em divertissa.*



C'HOANT am bez d'ho laqat da c'hoarzia,  
 Pa glêfot petra zo c'hoarvezet  
 Gant eun Ozac'h demeus ar vrô-mâ, daïc tala,  
 Gant eun Ozac'h demeus ar vrô-mâ  
 A zo bet fouettet gant e vreg.

An den-mâ a range lusqellat,  
 Ha mont ive bemdez d'ar ster,  
 Ha ma na blije qet an dillat, daïc tala,  
 En divije bazadou leiz e ler.

Qê pront dâ lusqellat ar buguel,  
 Sqüs è va fenn oc'h e glêvet,  
 Pe ma qemerân eur geuneuden, daïc tala,  
 Va mignon, me rai did monet.

## 6

Va fried, arabet e fachac'h,  
 Monet a rân da lusqellat :  
 Cousquit aze va mabic bian, daïc tala,  
 Mar fach ho mam ne m'oun qet net.

Yan, ret e dec'h sevel ar buguel,  
 E domma hac e valluri,  
 Oza ar yot, qempen an ty-màn, daïc tala,  
 Güelc'hi podou ha scudelli.

Me ya da dy va amazeguez,  
 Da gozeal eun nebeut c'hoas ;  
 Preparit lein aben ma teuin, daïc tala,  
 P'autramant ho po fest ar vas.

Qemeret ho plijadur, va fried,  
 Me yêlo doc'h avertissa ;  
 Caout a refot pep tra preparet, daïc tala,  
 Aben ma teufot da leïna.

Va fried, pa vo ho commodite,  
 Prest ê lein, trempet ar zouben ;  
 Me a ya va-unan da zervicha, daïc tala,  
 Da laqat güin en ho qüeren.

Yan, qeit ha ma vezin e leina,  
 Laqit buen dour var an tân,  
 Da voelc'hi plajou ha scudelli, daïc tala,  
 Ha podes va mabig bian.

## 7

Yan, amâ e zeus chomet souben,  
 Debrit hervez hoc'h appetit,  
 Hac esqern a zo mad da grignat, daïc tala,  
 Mes na douchit qet ous ar c'hiq.

Va friet, me a effe eur banne,  
 Eur zec'het bras a meus bremâ.  
 Qemer da veren eta, mevier, daïc tala,  
 Te a c'heus c'hoant eus a bep tra.

Mont a ra da rinça e veren,  
 Eur maleur gantân zo c'hoarvezet :  
 Gant ar bres en devoa d'e voalc'hi, daïc tala,  
 Etre e zaouaru ê torret.

Chom a eure a genn estonet;  
 Ma lavaras en eur grena :  
 Eur maleur zo ganén arruet, daïc tala,  
 Torret ê va güeren, emezâ.

Jarnicoton, eme Jacquette,  
 Bremâ ni a zanço ar bal :  
 Tennit ho praguezen, va mignon, daïc tala,  
 M'ho p'o an disciplin ractal.

Taflica flaca a beb costez,  
 Me ho tisco da derri güer,  
 Na netra demeus an tieguez, daïc tala,  
 C'houi oar ervad an traou zo qer.

## 8

**Va fried, ho pet ouzin truez,  
C'houi a laqai ar goad da redeg ;  
Me esse qent güin gant va boutes, daïc tala,  
Eguet terri güeren ebet.**

**Güisqit ho praguezen, va mignon,  
Hac it da rinça ar pôt-se :  
Divoallit na dorfac'h davantach, daïc tala,  
Netra ebet en ho pue.**

**Qen tra a dori en ti-màn,  
Me a grogo ouz bleo da ben,  
Ha memes tra ouz da ziouscouarn, daïc tala,  
Qen a zeuint qeit ha re eun azen.**

**Diouzin-m'eta, goaset yaou anq,  
Tachit da blijout d'ho craguez :  
Divoallit na viot re vechant, daïc tala,  
Pe viot fouettet coulz ha me.**

**FIN.**

---



---

**Montroulez, Imprimiri A. LEDAN.**